

ANJELA DUVAL
BARZHEZ / POÉTESSE
(1905-1981)



Ganet eo Anjela Duval d'an 3 a viz ebrel 1905 e Traoñ an Dour, e parrez ar C'hozh Varc'had. Merc'h da Erwan Vari Duval ha da Fransoazig Olier, labourat a raio gant he zud en ti-feurm, ha ne guitaas morse he Bro-Dreger c'henidik.

Pa varzas he zad hag he mamm e chomas hec'h unan, dizimez, gant he loened da zerc'hel menaj. Hanter-kant vloaz e oa Anjela pa grogas da skrivañ e brezhoneg. Reiñ a reas da gentañ barzhonegoù da Ar Bed Keltiek, renet gant Roparz Hemon ha da vBarr-Heol e 1962, ar pezh a oa dreistordinal evir ur beizantez. Da c'houde, an holl gelaouennoù brezhoneg a c'houlennas skridoù diganti.

E 1972 e voe-hi klevet gant ur bern a tud e-kerz un abadenn skinwell e galleg « Les Conteurs » renet gant André Voisin, skignet e Breizh ha Bro-C'hall. E pep kazetenn e oa embannet he c'hanaouennoù hag he barzhonegoù, gant ar brud-se e oa torret peoc'h ha sioulder he ti-feurm. Barzhez diwezhañ diwar ar maez e oa Anjela Duval.

Diskouez a ra en he barzhonegoù he c'harantez spiswel evit an natur, he c'hounnar a-enep da ziskar ar brezhoneg, hec'h ankenioù, he fent. Muioc'h a 500 barzhoneg a zo bet skrivet ganti ha lod anezho 'zo bet troet e galleg hag e saozneg.

D'ar 7 a viz Du 1981 e oa aet Anjela Duval da Anaon, graet e vez anezhi unan eus hor gwellañ barzhed gant an holl.

Anjela Duval naît le 3 avril 1905 à Traoñ an Dour, sur la commune du Vieux-Marché. Fille de Erwan Vari Duval et de Fransoazig Olier tous deux cultivateurs, elle travailla avec ses parents dans la ferme familiale, et ne quitta jamais son Trégor.

A la mort de ses parents, elle resta seule s'occuper de ses animaux et de la ferme. C'est à 50 ans qu'Anjela Duval prend sa plume et écrit ses premiers textes en breton. S'étant mise en quête de quelques revues en langue bretonne, on lui avait indiqué Ar Bed Keltiek, revue généraliste dirigée par Roparz Hemon. Elle collabora à cette revue en 1962, ce qui était exceptionnel pour une paysanne. Elle écrivit notamment dans la revue catholique Barr-heol. A la suite de ces publications, de nombreux journaux contactèrent Anjela Duval afin de publier ses écrits.

En 1972, elle s'était fait connaître du public français par l'émission d'André Voisin « Les Conteurs », diffusé en Bretagne et en France. Les journaux commencèrent à publier ses poèmes et ses chansons, ce qui rompt la tranquillité de sa ferme et de son quotidien. Anjela Duval était la dernière poétesse vivant en campagne. Ses poèmes révèlent son amour lucide de la nature, sa rage contre le déclin organisé du breton, ses angoisses, son humour.

Anjela Duval a écrit plus de 500 poèmes, dont certains ont été traduits en français ainsi qu'en anglais.

Elle décède le 7 novembre 1981, elle est aujourd'hui considérée comme la poétesse la plus reconnue de Bretagne.